



## CANTIC SPIRITUEL

### VAR GLAC'HAR AR VERCHEZ.

*Var ton Michel Nobletz.*

**J**ESUS ra vezó meulet hac e Vam beniguet,  
A zezir a wir galon sicour ar Vretonet;  
Revelet en deveus bet da eun den digo a feiz  
Scriva eur C'hantic nevez da bublia en Breiz.

Pa e güelas, an den-mâ a voe estonet bras;  
He Mab etre he divrec'h goude disqen ar Groas;  
E divrec'h hac e bizaj voa rusiet gant ar goad.  
Me vell e oll esperanç eur sujet admirabl.

Me meus qement a drue, emezi, ouzian oll,  
Me garfe gallout miret neidæ den da goll,  
Deut òn d'oc'h avertisse, m'ho ped ne vanqit qet,  
Disclèria caran sicour ar bec'herien dallet.

#### — 3 —

Vit an oll assistantet, Rouanéz, me ho ped,  
Contemplit ho clac'har vras, ma cassaint ar pec'het;  
Ma servicho ho taelou da voelc'hi hon ene,  
Me zezir, a wir galon, remission dèze.

Qemen den a regreto e amzer dremenet,  
Hac a güittai e viçou en amzer da zonet,  
Me assur en devezo remission plenier,  
Henvel ouz ar Vadalen, güechall gant hor Zalver.

Me garfe, en güirione, gout ar sujet a ze,  
M'ho poe qement a c'hlac'har e durant ho pue;  
Biscoas ne voe mam er bed qen truezus ha c'houi;  
Eus ho pers ne verijoc'h glac'har na melconi.

Pa anonças Gabriel e tougjen va Doué,  
E recevis eur joa vras em c'hrif hac em ene,  
Mes ur feunteun a c'hlac'har em c'halon a zavas,  
Qeit ha ma chomis er bed, nep amzer na cessas.

Pa ziscléryas Simeon etre ar brophetet,  
E voa deut ar Mab-unic da redima ar bed,  
Fachet voe ar Judevien pa glêvjont lavaret  
E c'hanjen eur c'hrouadur, hop goalan va güerc'hdet.

#### — 2 —

Itron, c'houi zo quer caret gant ho Mab beniguet,  
A guement a choulenfot ne viot refuzet,  
Il a possibl ve e renquercaout eur speret humen  
Da obteni ho reget eyit ar bec'herien.

Me a zo qen ordinal evel ma red an dour,  
O choulen digant ho Mab d'ar bec'herien recour,  
Hac o veza respontet : me n'ho refusàn qet,  
Ne allan qet pardoni da nep ne c'hoanta qet.

Var ze eta, Christenien, preparit ho speret  
Da receo en ho calon ar c'homzou annoncet  
A c'henou sacr ar Verc'hez, gant truez ouzomp-ni,  
Biscoas ne glêvas Christien qen truezus hac hi.

Va Jasus, leun a druez, permetit gant ho Mam  
Ma ellin antrepreni e dezir gant estlam ;  
Estranch a bep den habil consideri a vouez  
Gallout güela a galon ha cana assembles.

Qement den e zelaouo a bep seurt qalite,  
Zocrissoc'h eguet eun tigr, eguet eul k'ngoe,  
Ma na ell dont da vouela pa enten'e lenn,  
A ell donet da zonjal n'en dè qet güir Gristen.

#### — 4 —

Me mens en douguet nao mis etre va daou goste,  
Qen trist ha qen glac'haret, injurié gante,  
Gant qement a nec'hament hac aon eus va bue,  
Penevert va c'bonductor Joseph am asiste.

Pa dinessas an amzer da zonet var ar bed,  
Me zezire e c'henel en eur plaç preparet;  
Mes Doue a bermetas ha ma viont rentet  
Entre e adversourien er güær a Nazareth.

Da ben eun nebeudrude e voen avertisset  
Ma güittajen ar c'hontre rac ne vije lazet;  
Hennes voa an tec'hament, balamour d'ar buguel,  
Rencout güittat ar c'hartier pe lacat da vervel.

O Tad leun a drugare, sellit ho crouadur  
Hac e Vam quer glac'haret o vont en avenir  
Gant qement a haourente ! m'ho ped d'oasista :  
Allas ! me ne meus pouvoar német gouëla outa.

Pa voan éru en Egypt e sönjen caout repos,  
Mes en nebeut a amzer e chenlias direpos;  
Herodes a ordrenas elec'h ma commande,  
Ma vije incontinant lazet ar yugale.

— 5 —

Ne gafet speret humen a else disclèria  
 Ar glac'har am possedas pa glèvis qemen-mâ,  
 O tont da gonsideri eo an occasion  
 E lazer ar vugale vit laza ar mignon.

Meurbet e zòn estonet o consideri ze.  
 Ma anduras er bed-mâ qement a baourénte,  
 Qement a voa er bed-mâ en devoa oll crouet,  
 Hac a zentje sur outàn, ma vije e zouet.

Pa bec'has hon tad Adam e voamp oll ruinet,  
 Ma tispliehemp da Zoue en devoa horc'hrouet,  
 E zajemp oll d'an ifern, d'en nen devoa repos ;  
 Sujet voamp da Lucifer, serret voa'r Barados.

Dre drue ha carante ec'h ordrenas an Tad  
 Da gass ar Speret-Santel da incarni e Vab,  
 Ar boanniou a verite e oll grouadurien,  
 A zeziras da gouzanv hervez Doue ha den.

Pa voa éru an amzer a voa determinet  
 E yas gant e zisqibien d'ar jardin Olivet,  
 O veza oboissant da volonte e Dad.  
 Elec'h drouca veritemp, e tezir c'hoashormad.

— 7 —

Newet eiz ha tri-uguent e zê bet sez mil bla  
 Ar Barados voe serret o c'hortos qement-mâ ;  
 En e c'huerzàn evidomp, deàn omp oblijet,  
 Nep a gredo d'e lezen ne vezò qet collet.

Dre verit e bassion, Itron, eo hor prenas,  
 Ne recevas nep hini, hon die oll a baaes,  
 Ha gouscoude pa lennàn, e cavàn rapportet.  
 Pa zeont eus ar bed-mâ calz a dud zo daonet.

Qer bras voe e garante evit e vugale,  
 Ma permet da bep hini ober e volonte ;  
 N'ellont qet lavarat qeit ha ma int er bed-mân :  
 Me zo crouet gant Doue evit sujet deàn.

Disqeanit, me ho suppli, va Mab, demeus ar Groas,  
 Vit m'en ambrassin amàn var ar glinoat glas ;  
 Emedi er baourente, var an teil eo ganet,  
 Hac en noas ez è maro, bac en noaz entèret.

Me bed Joseph, va mignon, abers Doue an Tad,  
 Da ober eur bez neve evit laqat va Mab,  
 Pa vezò ressuscitet, ha na vurmuro den,  
 Pa vezò ressuscitet na ve qet va Mab ve.

— 6 —

D'ar güener mintin golo e teu Yan da velet,  
 Hac én en noas divisqet qazi voe trelatet,  
 Hac e lavaras : Mari, emâ eo ar glac'har,  
 He Mab a zo qemeret eguis eur c'hrimioal.

Qement ma heulias velet e zòn êt d'ar mene,  
 Ma finis dizesperi pa na ellen mervel,  
 O vont etre daou laeron n'o anaveent qet,  
 E oad, e guio, e groc'hen a voa oll dispennet.

Pa voe divisqet ar zè, e velen e esqern,  
 Neuze e velis c'hoezec o chassa gant qerden  
 Var e dreid hac e zivroc'h ha diouz toullou ar Groas  
 Sur e verit'er peo'her caout punition vrás.

Pa voe goroet en noas e enep an amzer,  
 E soufras injuriou bras etre an daou voler :  
 Te a lavaras bea Roue ar Judeanet,  
 Ni es laqa cabiten etre ar brigantet.

Qent eguet ma finissas ne réfusas nicùn,  
 Meritou e bassion d'an oll a voa commun,  
 E roas Demp da entent ne voa den refuzet,  
 Digor vo ar Barados qen a vo fin ar bed.

— 8 —

Pa voamp eus e entèri, neuze ec'h éruas  
 Ar Judevien arrajet hac a epouvantas,  
 Ma quittas va mignonet gant spont ouz ogüelet,  
 Hac e chomis va-unan hep gout pelec'h monet.

Va Zad beniguet en én, hac én a voe biscoas  
 Eur femelen var ar bed a eur glac'har quer bras !  
 Cetu mè abandonet var menez Calvari ;  
 An nôs a zo o tonet, ho pet truez ouzin.

Autrou Doue, va C'hrouer, roit patientet,  
 Gant va Mab, pa voe er Groas, me voe recommandet  
 Deàn da veza va Mab, ha mè da Yam deàn ;  
 Hac ez'òn quittet gantàn ha lèzet va-unan.

Me ne meus qet ho quittet na birviqennarìn,  
 Bet òn o pourvea cambr evit ho repui,  
 Qemerit patientet, Mari, na vouelet mui,  
 Dont a rai aben tri de ho Mab d'ho consoli.

Nè voa speret qen parfet nac Allez eti énvou  
 A garfe bea er gampr da glèvet ar c'havou  
 A ra ar Yam a druez gant ar glac'har d'bie Mab  
 Criz è ar galon'ne zònj na déufe da dristat.

## — 9 —

Me eo an druezussa a voe biscoas er bed,  
Gant an oll òn dispriset, cassêt, dizenoret,  
Eguis eun oan egaret etre al leoned,  
Pa zon lêzel gant va Mab, va Zad vad va sicouret.

Allas ! pelec'h e zin-me pa vezo deut an dez ?  
Mui a valiq zo ouzòn eguet a garantez ;  
Ma sortiàn, ne velin nemet an tirantet,  
A garfe va merzeria, vad Zad, mar permetet.

Er plaç-mâ e voe Mari o vouela nos a deiz,  
Hep na debri nac eva e spaç eus a zri deiz,  
O contempli ar boanniou a verit ar pec'het  
Truez eus ar bec'herien en amzer da zonet.

Pa ressuscitas va Mab, e teuas d'am güelet,  
Ha me goulen digantàn : e pelec'h e zoc'h bet,  
O serri pors an ifern, va Mam, eo e teuàñ.  
Qement a voa o c'houzàn a meus lamet a boan.

Calz a dud malin a vo va goude var ar bed,  
Hac a vo qen efrontet, va Mam, da lavaret :  
Pan'en deus nemet ur plaq' è rât e yemp salvet,  
A souille ar Barados, va Mam, gant o fec'het.

## — 11 —

Evit dilèzel ar bed me ne ràn qet a gas,  
O qüittat ar Gristenien e meus melconi bras ;  
Chom da vouela evito a garfen er bed-mâñ,  
N'en daë d'en d'an ifern evit anduri poan.

En qeit ha ma tezire Mari chom var ar-bed,  
Ho Mab ho car qer parfet ha no refuso qet ;  
Daouzez blasha tri-uguent aboe e zoc'h er bed,  
Poent eo qüittat arglac'har ha bea consolet.

Va mab, me a zezire vize an ebrestel  
Presant ouz va asista pa deujen da verval :  
Va guervel a rent o Mam hac o zoulajamant,  
Ma lezin dezo va c'horf evit va zestamant.

An ebrestel egaret a bep contre a bell  
A voe souden assamblet neuze var eur goabren,  
Ha rentet en un instant ergambr ar miracl bras  
Da zonet d'e asista, rezervet Sant Thomas.

Thomas neuze en Egypt a voa neuze rentet,  
Ne voar qet e pe feçon, er Jardin Olivet,  
Evit gallout rî rapport ar myster admirabl,  
Er plaç ma velas e vestr o c'hoezi dour ha goad.

## — 10 —

Va Zalver, me ho suppli, ha n'am dilexit qet,  
Recommandit va ene d'bon Tad, crouter ar bed ;  
Ho pezit sònj ac'handù e Barados ar gloar,  
Ma vin caret en ênvou, pa n'en dòn en douar.

Tri bla varnuguent goude ez eo bet en buez,  
Da gourachi an ebrestel da bublia ar feiz.  
Qement graçou na vertuz a zisqen en douar,  
A dremen dre e daouarn dre vertu e glac'har.

A het tri bloa varnuguent bemde e zê Mari  
Da zaludi Croas he Mab var menez Calvari ;  
Biscoas n'en em gontantas o veza deiz ha nôs  
O reqeti ma yaze an oll d'ar Barados.

Pa gonsideras he Mab, n'en em gontante qet  
Da reqeti digantàn qüittât poanniou ar bed,  
E tigassas Gabriel en e c'hambr' eus an èe,  
Da annonci da Vari pé da heur e varvje.

Pa ho salûdis qenta, Mari, me a zônje  
E vije contantamant ha joayou ho pije ;  
Nemet glac'har ha poaniou goude ze noc'h eus bet,  
Ha c'houi ve oboissant da zilèzel ar bed ?

## — 12 —

Dre eun inspiration e tisqennas timat  
Eus a Jardin Olivet e traouyen Josaphat,  
Ma cayas an Ebrestel, hac int oll glac'haret,  
O voela d'o Mam Mari e devoa o c'hüittet.

Disqüelit din, vabreudeur, ar bez ma voe Mari  
Rac me a grêd assuret brêmâ ne medi mui ;  
Me meus-hi anaveet o vont corf hac ene  
E compagnuez he Mab, ar Zent hac an Èle.

Te, eme Pêr da Dhomais, a zo incredulus,  
Ne gredes qet e vije ressuscitet Jesus,  
Penevert ma e laqas da douch e bemp gouli,  
Ha bremâ ne gredes qef e ma er bez Mari.

Me ho suppli, permetit ma tigorin ar be,  
Ha neuze me a rî dêc'h güelet ar yirione ;  
Pa voe digoret ar be, ne voa netra enpâ  
Nemet al lincel a voa laqet d'he liana.

Nemet Doue ne alie disclêria ar glac'har,  
Qement e voent estonet ma coeent d'an douar ;  
Ne allant qet caout couraj da zevel ac'hane,  
Qen ne vijent consolet gant an Èl eus an èe.

— 13 —

Pà vo ar Varn jeneral, va c'halon a ro din  
 Né meus qet bet var ar bed qément a velconi  
 Evel am bezo neuze, pa glèvin ar re daonet  
 O c'houlen ouzin sicour, ha me ne ellin qet.

Me a gred pa c'houlennot e cavo agreabl,  
 Ne zeus netra impossibl da Jesus-Christ ho Mab;  
 N'en deo qet bras ar myster deoc'h caout ze digantà,  
 Evel ober an douar hac an ên a netra.

Me a reqet ouz va Mab da rei pardon deuze,  
 Me ne vezò nemedòn e prezeg evite;  
 An oll breditoret, memes an ebrestel,  
 A vezò sur em enep avocadet contrel.

Va Mab, goëla a reont ha n'o c'houlon solit qet.  
 Me a c'houlen evito ma viont consolet;  
 Ma noc'h eus true oute, sellit ho Mam Mari  
 Zo dirac ho Majestie quer glac'haret hac hi.

Va Mam guèz, ne deo qet me zo qiriec d'ho clac'har,  
 N'e dévoa qet meritét pa voan var an douar;  
 Brassoc'h myster e casen rèi o fardon deuze,  
 Eguet pa grouis ar môr, an douar hac an èe.

— 15 —

Jesus, a c'houi a garfe e coesemp a enep?  
 Ni hor boa grêt hon never etre voamp var ar bed:  
 Ni a garfe assuré ne vijemp qet crouet,  
 Da vea control d'ho Mam a zo qen estlamet.

Mari, pa è ordrenet, e zèo ret din parlant :  
 Ni hor boa-hi instruet e leuj'er jujamant.  
 Mar dè ni a zo manqet, ni reqet diganec'h,  
 Evit ma vimp oll salvet da vont d'an ên ganec'h.

Jesus, ni a zoprezant dirac ho Majestie ;  
 Ni a zisqüelo dezo an hent demeus an èe ;  
 Ni reqet diganeoc'h, mar dè ni zo manqet,  
 Ha ma viont-i salvet, ha ni oll pardonet.

Va Mam, ha c'houi gred brêmà mo n'ho refusin qet,  
 Ma ne meus qet o c'houet evit bea daonet :  
 An diaoul o deus choazet da gonductor dèze ;  
 Chom a raint en ifern bed eun eternite.

Ne ven qet eur barner just ma lamfen digante  
 Qément o devoa choazet pa voant en e o bue ;  
 Me varvas en ho presanç da bêa o rançon,  
 Hac a ro brêma deuze va malediction.

— 38 —

— 14 —

Birviqen oc'h nec'hamant ne allac'h va miret,  
 Mar disqueannont d'an ifern ha mar bezont daonet;  
 Abalamour d'an divron en deveus o lèzet,  
 Ho pezit true oute, n'ho c'hondaonit-hi qet.

Me garfe em be gallout da zisqüez va c'halon,  
 Da reqeli diganec'h dezo remission,  
 Pa na servich va daëlou, va divron ha va lèz,  
 Va Mab, bras eo ho coler refus ar pec'her qès.

Va Mab, it d'ho Parados gant ar re zo salvet,  
 Ha va lezit er plaç-mâ evit goela heprent,  
 Gant an dour em daoulagad me o güelc'hô quer net,  
 Digna vont d'ar Barados n'oc'hondaonit-yqet.

N'ellent-y qet beza net ha quittat o fec'het,  
 C'houi a voar ar virione ar pez a meus soufret ;  
 Ne meus netra espernet d'o renta evit poan,  
 Meprizet o deus va goad, ret è dèze gouzàn.

Ennes vezò an estlam pa vezò deut an de,  
 Qément a vezò presant a vo spontet neuze  
 O clévet ar Mab, ar Yam n'en em accordont qet,  
 O sónjal er re daonet p'est da veza barnet.

— 16 —

Sonjomp eta, Christenien, er glac'har a Vari,  
 Gant truez eus hon ene reqetomp diganti  
 D'en em viret ouz pec'het na vezomp qet qefret  
 D'hor Mam Mari da voela ouz hor güelel daonet.

Itron Vari a Druez, entre m'omp en bue,  
 Pedit ar Speret-Santel d'hon inspira bemde  
 Da garet, da zervicha ho Mab gant dilijanç,  
 Hac en hon heur divea da gaouthoc'h assistanç.

FIN.




---

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.